

AR GWENN HA DU POOL

FEST AR VAZH

Emaomp e 2025, nepell diouzh Lannuon. Ur c'hlub c'hoarierien sot gant ar bilhard a vez o telc'hen penn ouzh ar c'hluboù bras c'hoazh... Staliet eo ar Gwenn Ha Du Pool e Kaouenneg-Lanvezeeg ha brudet eo e Frañs a-bezh. Difial a ra ingal ar vegenn eus sportourien an diskiblezh-se ha kampioned ar Bed a c'haller gwelet e-touez izili ar gevredigezh zoken... met mont a reont holl diouzh o ger-stur bepred : ar blijadur.

Emaomp e fin un abardaevezh e miz Here ha fresk eo an amzer e-kreiz bourk Kaouenneg-Lanvezeeg. Mont a reomp e-barzh ur batis hag a ra dimp soñjal e kal ul lestr koad divent, ma'c'h eo tomm an degemer. Un aergelc'h moug zo ha sipet eo evezh an dud tro-dro da seizh bilhard. Emaomp e loj ar Gwenn Ha Du Pool. Ur sal vras eo en estaj ar Gwenn Ha Du, un davarn-ispiseri hag a zo dalc'het gant Sylvie ha Joe Drapeau, ma c'hall an 50 ezel eus ar c'hlub dont gant ur c'hod niverel, Sul-ouel-pemdez etre 8e ha hanternoz, evit pleustriñ. An izili a zeu eus pell a-wechoù. « *Bezañ zo izili hag a zeu eus Penn-ar-Bed pe ar Mor-Bihan. Un Alaman a oa bet o vakañsiñ amañ en hañv diwezhañ abalamour da c'hallout pleustriñ zoken* », a lavar Joe Drapeau, an den hag en doa diazezet ar Gwenn ha Du Poole 2003. Dav eo lavaret e ra ar c'hlub gant danfram-moù mat-kaer, gant pemp blackball (pe bilhard saoz), ur snooker hag ur bilhard amerikan.

Un ugent bennak a c'hoarierien hag a c'hoarierzed a oa deuet da bleustriñ en nozvezh-se, tud a bep seurt hag a bep oad. « *Amañ e vez a bep seurt rum-madoù sokio-michereel kichen-ha-kichen : pennoù embregerezhioù, sternerien, micherourien...* » eme David Daeron, prezidant ar gevredigezh. Ur meskaj eo ma kaver mailhed war ar bilhard koulz ha tud hag a zo o kregiñ ganti. Evel Anaig : « *Ma mab zo o c'hoari bilhard tri bloaz zo neuze em eus bet c'hoant d'ober un taol-esa... ha plijout a*

PLUS D'INFOS
📍 Club-école de billard Le Gwenn Ha Du Pool

ra din. Lakaet a ra ar spered da labourat, bezañ sipet, kaout un taktik ! » en he c'hichen emañ Cyril, hag eñ o kregiñ ganti ivez, hag ar pezh a blij dezhañ eo « *an aergelc'h mat a vez o ren amañ ha braventez ar sport-se* ». Evit Jean-Pierre Durand, prezidant Kevre Breizh ar bilhard ha bet prezidant ar c'hlub, ec'h eo kentoc'h « *ar sport hag ar c'hevezadegoù* ».

Rak dav eo pouezañ : ur sport da vat eo ar bilhard hag anavezet eo evel-se gant ar ministre-

rezh. Koulskoude « *e laka an dud da soñjal betek re en ostalerioù c'hoazh* » eme David Daeron, dipitet. Ar c'hafe-ispiseri e rez-andouar, gant e dri bilhard, zo ul lec'h pouezus evit ar c'henstrivadegoù etre ostalerioù bepred, evit ar c'henstrivadegoù meur avat, dalc'het e vezont e salioù a-zoare ha meret e vezont gant kevread bilhard Frañs.



An 50 ezel a c'hall mont da bleustriñ e sal ar Gwenn Ha Du Pool pa faot dezhe. Evel Deborah Corest, teñzorerez ar gevredigezh ha c'hoarierez aketus, a weler en dalenn gentañ war al luc'hskeudenn.

STÉPHANIE PRÉMEL

EVEL AR C'HEVRE 1 E BED AR VELL-DROAD

Ha kement ha lâret, ar c'hluboù bras a vez o krenañ dirak ar Gwenn Ha Du Pool. Chomet e oa pemp bloaz, betek 2023, er Rummad broadel 1 evit ar blackball, ar pezh a gord gant ar C'hevre 1 evit ar vell-droad. Ha taolioù-kaer brav o deus graet izili ar c'hlub ivez, pa zo deuet tri anezhe a-benn da vezañ kampioned ar bed (Erwan Drapeau, Cédric ar C'helleg ha Calvin Kreac'h) ha meur a gampion Frañs zo ivez. Kentelioù a-feson a vez roet amañ d'ar c'hoarierien ha d'ar c'hoarierzed, da vareoù lakaet espres-kaer evite, gant daou gelenner diplomet gant ar c'hevread. 8e30 noz eo ha setu echu ar bleustradeg. Er-maez, a-dal ar Gwenn Ha Du dres, emañ an iliz o sonañ. Adlakomp anezhi e kreiz ar bourk : « *Lavaret e vez « cannes » ha neket « queues », « poches » ha neket « trous », « billes » ha neket « boules »* » eme ar prezidant da glozañ. Lavaret zo bet ec'h eo ar bilhard un dachenn sirius. ●

Stéphanie Prémel

**« PENNOÙ
EMBREGEREZHIOÙ,
STERNERIEN,
MICHEROURIEN... »**